



CAMPAGNOU

AN

AMPEREUR NAPOLEON

A MEULEUDIOU E FILLOR,

AN

AMPEREUR AR FRANSICIEN.

Pobl vaillant deus a Vreiz-Izel, prestit oc'h attantion
 Evit clevet cana ur recit var buez Napoleon ;
 Var ar c'hampagnou gloriuz var an oll puissançou ;
 Oute e bed victorius e despet d'o c'holl armeou.

Napoleon a voa ganet er guer a C'Hajacio,
 Ac a soing vras eo bed disquet abars quitad e vro,
 Guitad a ra e fonccion, e furnes hac e studi,
 Evit antreal e armeou evit dont da gombati.

Toulon, o veza bet livret da enemiet Sozon,
 Napoleon a voa hanvet neuze chef a vataillon ;
 Ha gant ur gourach ar vrasa e commandas an arme
 Hac ar victor a c'honeze partoud e lec'h ma c'hantree.

Antren a ra ebars er c'horf prest evel souletenant,
 A douget gant ur respect vras e tal drapo ar regiment ;
 Ha pa c'halver en baros, quen mignon bras d'ar victor,
 Napoleon a respontas : ar gololen infernal.

Antren a ra e armeou evit hon indepandaus,
 Napoleon carguet a joa evit sicour ar Frans ;
 Mes e valantis burzudus hac ar cuerz eus ar vaillans,
 Napoleon a voa hanvet quenta general a Frans.

An drivac'hvet a vis mae ar c'honsul Napoleon
A voa gant solanite vras haavet gand an nacion
Evit gouarn ar Fransicien , gant an titr a ampereur ,
An egl imperial souden gant enor a receiver.

Forma a eure dre jalousi , a enep an ampereur ,
Teir aliens , da gombati , carguet demeus a fulor ;
Batail brilland Friedland , Friedland , Friedland ,
Hac e ber amzer ho forsas da dreti gantan.

An hostilete a cessas etre an daou ampereur ,
Hac an trete a gommansas a sinet en or faveur.
Napoleon a deu e Frans , neuze , carguet a lore ,
Avantachou a obtenas dezan couls a d'e arme.

Trei a ra neuze e armou a enep ar Portugal ;
Eno e tressas e afferiou , ar c'hommers en general ,
Neuze ivez e soumettas ar Spagn dindan e bouvoir ,
Hac e vreur Josep a blassas var an tron , goude ractal.

Dabord e sorti eus a Spagn o clevet e zeus eru
Cals troupon eus an Allemagne evit ravagi e vro ;
En em gaoud a ra e dilijanç gant e arme formidabl ,
Adare e quemer ker Vienn , adare eo triumphant.

C'hoas e c'houlenne ouспен e guis eun den a verit
Oll dalanchou ar Profeted hac ar roue David ,
Evel ma eurent o tisquen dar blenen ,
An Ampereur Bonapart hac e offiserrien.

Eruet var ar blenen neuze gant cals a gourach ,
Gant eur vouez ferm e lavaras d'e troupon :
Songit , songit , va zoudardet , e vezo red combatti ,
Hac ar victor pa vezo gonezet me deuy d'o recompansi.

Donet e ra da gombati eus Montesco fermamant ,
Ar russiannet oll e devas cazi oll yecontinant ,
Hac a bartias ac'hane vid mond da Vorodino ,
Evit antren en o arme peini a gampe eno.

Napoleon a dremenas prontamant rivier Odren ,
Hac er Vistul en em dollas gant courach a gant e ferder ;
Avans a ra eb areti gant e arme formidabl
Er vro sclas eveus a Russi , sauvach , vil a detestabl.

Napoleon ho foursuas betec rivier Moscova ,
Hac eno en em angajas ar gombat an terrupla ;
Ar victor a vone balancet epad meur a vinuten ,
Er fin e zeo-bed disclerriet deus costes ar francisien.

An erc'h, ar sclas, ar yennien hac ar famin a zeuas
Da veza efroyab souden dre hou armeou, allas ;
Obliget int da gombati d'oc'h ho naen hac ho zec'het ;
A bataillonou ar Russi a sco eazi beb momant.

Hou arme a zo distruget gant an oll elemanchou ;
Eur vizer vras o deus souffret, campet var ar Silassennou,
Hac e songet distrei e Frans aroc d'an enemiet ;
E voint scoet gant violanç ha gant malheur completet.

Napoleon a deu e Frans ac a sao trou pou neve ;
Neuze, carguet a esperans, e rejouissans e c'harme,
Batail Luxen a Bossen ramportet gant conscriet,
Neuze e ra credi souden e vige sovetet.

Compozet eo an arme vras d'oc'h a bevar c'haat mil den ;
Ar gavaliri a zayas da c'huerc'h ugent mil, souden ;
Mil daou c'haat pez a ganoliou, ive, a voa preparet
Da segonti an armeou e lec'h ma vige renquet.

Monet a ra an arme vras evit en em ampari,
Mæs, allas ! ar gonscriet ne voint qued evit c'hoari,
A dabord e voent antouret gant trou pou enemi
Hac a beb tu voent attaque, forcet voient da reculi.

Comeret e Napoleon evit monet e exil,
Evit mond da Santes-Elena, evit souffrals a vizer ;
Stracal a ra e galon o cuitad e bro Frans.
Adieu, emezan, va oll arme, ne meus mui a esperans.

Setu ama ar himiad diveza demeus a vestr ar victor,
Goude lacat bro guer ar Frans ebars en e frosperite.
Allas ! e mean, va arme, er vech-man on traisset,
N'eur gavout a rei tud eus va lignez hac e vezint ramplacet.

Ne oufet biquen niveri an nombr eus ar victoriou ;
An Europ oll a voa tesd mad voa mestr var an oll broyou ;
Lacât a eure bro ger ar Frans da guenta var lein ar gloar,
Dre e valantis burzudus, e furnez hac e bouvoar.

Pa voa laquet Napoleon d'ampereur d'ar Fransicien
E voa chacheed oc'h ar Frans ar religion christen ;
Ne voa na belec nac ofis, seret an oll ilizou ;
Mez quend ma voa bed traisset e voant toud en o flasou.

Queid a ma voa e lacat e boan da blassi ar religion
E voa e vrassa mignonet e formi an draizon ;
D'en exila e mæs ar Frans hac e gas d'en enezen
Elec'h ma zeo bed decedet ha marvet e guir gristen.

Assistet gand ur belec mad en e amzer diveza,
Da c'houlen pardon ous Doue a da n'eur gonvertissa;
Bed e deus e sacramanchou quen mond divar an douar.
Leveromp un de profundis, ma zeñ e ene d'ar gloar.

Brema zo choazet evit mestr ur fillor d'oc'h e lignes;
E man ar boneur en e zorn hac ar bobl zo en e gostes;
Ober a rei e volontez, ma na vez qued traisset;
Mar bes fidel d'or mestr divin ne vo qued abandonet.

Birviquen peoc'h na vez ma vo troublet or beden
A demunnet an injur a rer d'or mestr souveron:
Beuzet ar bed gant ar pec'het a na veler nemettan;
Seuiza a rei Doue dious or guelet, hac a deuyo d'or punissa.

Henor d'an ampereur Napoleon hac enor bras d'e arme,
D'ar vartolodet a galon, d'an oll brefetet ive,
Ha d'an oll merriou deus a Frans, d'an oll otoriteou,
Evit ma c'hañt tout er memeus mouez evit souten or bro.

Requetomp oll digant Doue demeus a greis or c'halon
Ma reno eñars e Frans an impalaer Napoleon:
Graç dezan da elloud rena evit boneur ar Francien,
Ha graç dean d'elloud beza guir dad da heb sitoyen.

Brema, Francien, evel bredeur adressomp hon oll veuyou
Da Zoue a tao or boneur vid obten ar faveriou
A graç da arme bras ar Frans, evit ma c'hellint trec'hi
A da c'honid ar victor, mar be red deze combatti.

Leveromp-ni oll, Francien, leveromp oll a galon,
Assambles gant an esquibien, guir feis ar religion,
A ma teuyo ar bastoret da bedi ar guir Doue,
Dan ampereur Napoleon hac ive d'e oll arme.

An ini an eus recitet campagnou Napoleon
A meledi an Ampereur tri, a gommand an nation,
Zo e hano *Allan ar Yaouanc*, e chomp e Pen-ar-Quingis,
E commun Pleyber-Christ, feurmeur e d'eur marquiss.

FIN.

*Ar proprietour a zifen an impression, nemert clec'h
ma eo bet imprimet.*